
CHANSON NEVEZ

461. A

Var ton : AR MELINER.

AR GOAS

DEBONJOUR d'êc'h, va douç Jannet an daelou em daoulagad,
 Cetu me deut c'hoas d'ho quelet qen sonjal dont d'ho quitat,
 Qent quittat an nep a garàn mui guetqement tras'orbed;
 Pebes calonat evidon goude beza re garet!

AR PLAC'H.

Meurbet ez on-me estonet, den yaouanq, ous ho quelet;
 Sesisset hoc'h eus va c'halon ous ho quelet qer mantret;
 Arrêtit, sec'hit ho taelou, ha disclêryt franchamant
 Petra sinifi ho comzou, petra ê ho nec'hamant.

AR GOAS.

Ho temeuranç sur, va mestrez, zo em chalon qer parfet
 Qen na ouffen-me birviquen e lemel dious va speret.
 Racc'houi noc'h eus nemet meprisha meprisanç evidon.
 Ansavit bremâ hep fentis hag m'en em glem hep rêson?

AR PLAC'H.

Me voar e zoc'h ventet captif certen d'an amouroustet,
 Dre m'oc'h leget ho speret da re garet un objet:
 Un qen yaouanq a dle bea mestr absolù d'e galon
 Mes c'houi a zo, var a velàn, güir esclav da Gupid.

AR GOAS.

An aour, pa ve purifiet, a dremener dre an tan;
 Ha va c'halonic, va mestrez, a zo henval braz outàn:
 Sulvuit rit ouz va dilezel, sulvui ràn ouz ho caret,
 Hama zoc'h ouzin qer cruel, me zo douç en oc'h andret.

— 7 —

AR PLAC'H

Da betra teut d'en em dale, den yaouanq, d'an da-
 [rempre
 Ne sonjit mui en gementse, rentit tranquil ho speret
 Laqit ar peoch en ho calon, a sonjit enni a grenn,
 P'otramant hoc'h affection am zromplo a dra certain.

AR GOAS

Me ya brema d'ho tilezel evel ur Gananeen,
 Mes me a grio mi-ouz-mui qen na glêfot va feden,
 Ha pa ho po va approuvet ha gonêt ha mez zo car,
 E teufot neuze d'am c'harout gant ur galon hep e far.

AR PLAC'H

Caer oc'h eus clasq va zistrei gant ho comzou eloquant,
 Rac me a vo en hoc'h enep da vigen ferm a constant ;
 Qen e tisplantfac'h ar steret demeus an ên gant ho tent
 Evit n'o pe va distroet den yaouanq, dre nep sort hent.

AR GOAS

Pel a zo demeus a amzer ec'h exercen ân enor
 Alies demeus a veach, va mestrez da doul ho tor,
 Da guichen toul dor ho calon, o clasq antreal enni,
 Mes c'hui a zo qen dirêson, hac a zeu d'am refusi.

AR PLAC'H.

Pel amzer a zo tremenet ha qeit all a dremeno,
 Bigen james var va speret nep rêson sur n'ho pezo.
 Mehoped dout d'am diezel, rac-se-ta choasit ho plac'h,
 Bigen james n'o qemeran, credit ar pezh a laràn dac'h.

AR GOAS.

Evit ho contraign d'am c'haret, me ho ped da viana
 Da sònjâl voamp hon daou choaset gant Adam, hon tad
 [qenta
 Demeus al lezen naturel om c'hontraign d'ho caret ive
 Lennet ê demp an Aviel, gout a rit se coulz ha me.

— 8 —

AR PLAC'H

Eleal assur, den yaouanq, certen ho carout a ràn,
Ia ê guir ho bemde d'ar merc'het eus ar vrô-mâ ;
Ma vijent em possession, c'houi pije'r c'hoas anezo,
Mes evidon me a bromet birviquen sur n'ho pezo.

AR GOAS

Preciussa tensor un den ê certen ur galon bur,
Qementse a zo qer guirion evel ma zê ar Scritur :
C'houi ê va zenzor, va mestrez a rouanez va c'halon,
Ha mar don-me deut d'ho quelet, ê gant guir intantion.

AR PLAC'H

Meoc'h anave, den yaouanq, eviteun den drol meurbet,
Dre moc'h eus laqet ho speret da garet nep n'ho carqet ;
Mes choasit eun all evidoc'h a ouffe ho consoli,
Rac evidon n'allàn chom aman da ziscouri.

AR GOAS

Ho quittä a ràn, va mestrez, pa ê rêl ho tilezel,
Mes evit se va amitie a vezo bepret fidel ;
Poent ê demp eta conclui, finissa ha lavaret
Penos ê fachus da un den carout hep beza caret.

AR PLAC'H

Ho quittä a ràn, den yaouanq, o rêi d'êc'h evit gentel
Ar c'homzou caër-mâ a lenner ebars ar scritur santel :
Choasit Rouantelez Doue hac e justic da guenta,
Qent me vezo d'êc'h accordet hoc'h oll dezir er bed-mâ.

FIN.

E Montroulez, e ty LANOÉ, ru ar Pave.